

Clémran.

Eus eun Den yaouanq pehini eun deus collet e Vestriez.

(437)

Var ton :

Tostait da glévet, hac e léfot va c'hlemon;
Roit, mar deus moyen, soulajamant d'am poanion;
Atlas! dificil eo soulaji va speret:
Deus eun tourmant qer cri n'en eus mui a remed.

Maro cri hac ingrat! te ac'heus va glac'haret,
Te heus lamet diganén nep a garien parfet.
Bremâ me nemeus den a gement am c'honsolfe,
Pa eo lamet diganén va Douq, va c'harante.

Maro eo va c'harante, maro eo va esperanq;
Adieu d'am plijadur, adieu d'am oll gonfianq;
Adieu d'am c'harante, adieu d'am plijadur,
Cetu me collet oll en eun ober eun heur.

An douqder eus an dour o reded dre ar voazion,
Heurtet ha diheurtet partout gant ar vèinigon,
Hac a deu bep moment da droubli va speret,
Ha da zigas din sonch eus va mui-carec.

(438)

Evel eun ouades a ve e creis ar mor don,
Eo beuzet va c'halon, ep caout consolation;
Evel eur c'hareat fleur carget eus a louzon
Eo beuzet va c'halon gant an huanadou.

Rozen eus ar mintin a ve en he yeoni,
Dre ma avanq an deiz a gomant da voenri.
Me a c'hoare ganén casi ar memes tra,
Dre ma avanq an amzer ne rân nemet quella.

Me ameus eur feunteun bars en cornic va jardin,

259

Eno me ve cavet deus an nos hac ar mintin;
 Eno me ve cavet alies amzer an de
 O tonet da voela da varo va c'harante.

(439) All arrou eus ar bed, clezeyer ha sabrinier,
 Da finissa va bue, ma zin da velet va Zalver,
 C'hoant bras ameus da vont da bales an Drinded,
 M'am befe ar bonheur eur veach da vonet.

(Vol. II, p. 437-439.)
 8 str. numérotées.